

Brezhoneg e skolaj Jakez Prevert !



AC'HANTA TOUD AN DUD !!!

Klasad ar re 6 ha 5vet divyezhek Skolaj Jakez Prevert omp-ni. Eizh plac'h ha 4 faotr a zo enni.

Kentelioù Brezhoneg , sonerezh hag istor-geografiezh e bezhoneg a vez heuliet ganeomp ouzhpenn ar c'hentelioù all e galleg. Seizh eurvezh kentel e brezhoneg a vez ganeomp a-hed ar sizhun !

Gwendal ar Bras eo hor c'helenner war ar sonerezh ha Yoann An Nedeleg eo hor c'helenner war ar brezhoneg hag istor-geografiezh ivez!

Ur bern traoù hon eus graet dibaoe penn kentañ ar bloaz er c'hentelioù-mañ: kanañ, krouiñ pennadoù evit internet, sketchoù, selaou sonerezh, kaligrafiezh, mont da bourmen, labourat war bandennoù-treset, labourat war ar c'hartoon hag ur bern raktresoù all! Kment-mañ gant plijadur hag e brezhoneg!

Un aergelc'h plijus a zo 'barzh ar c'hlas ha laouen bras omp pa vez degemeret brezhonegerien all enni evel just!



Ewen

Lily

Metig

Margot

Thélieau

Erwan

Enora

Sarah

Pierre

Maiwenn

Annaig

Klervie

Degemer mat war lec'hienn hor skolaj ha ken vefoc'h gwelet dizale du-mañ !!

